



Douarnenez, Terre citoyenne  
7 ru Voltaire  
29100 Douarnenez  
dzterrecitoyenne@gmail.com  
douarnenez-terrecitoyenne.bzh  
06 74 16 99 96

E Douarnenez, d'ar 5 a viz Meurzh 2020

Itronezed, aotrounez,

Da gentañ-penn e fell deomp ho trugarekaat evit bezañ aet e darempred ganeomp ha bezañ savet goulennoù reizh. Eveldoc'h e soñj deomp eo pouezus-meurbet kemer e kont yezh ha sevenadur Breizh er vuhez foran. Sikour a reont evit kompren hon tiriad hag ur binvidigezh sevenadurel ez eo evit an holl. Met e-giz e lârit ez eo mallus-kenañ an degouezh ha poent bras eo kas politikerezhioù youlek evit ar brezhoneg e Douarnenez.

Evidomp-ni eo anat a-walc'h ez eo al listenn *Douarnenez, Douar keodedel* al listenn nemeti eus an teir war ar renk hag a zoug ar stourm evit ar brezhoneg e Douarnenez. An hini nemeti he deus c'hoant da lakaat anezhañ da vevañ, pell eus ar gartenn-bost "tipik-kenañ". Abred hon eus kemeret engouestloù evel lakaat un dilennad dave en ti-kêr, souten digoridigezh un hentenn divyezhek all, ha kenderc'hel gant diorren ar garta *Ya d'ar brezhoneg* a zo bet dilezet abaoe 12 vloaz. Sed aze hon tri engouestl pennañ. Eus an teir listenn omp-ni an hini nemeti he deus lakaet brezhoneg e-barzh he c'hehentiñ hag he frogramm, paneve ur frazenn gamm gant ar re all pe netra tout zoken. Eus an teir listenn omp-ni an hini nemeti a gaso brezhonegerien ha brezhonegerezed er c'huzul-kêr, ar pezh a aesaio an traoù evit kompren an dalc'hioù tro-dro d'ar brezhoneg. Evidomp-ni n'eo ket ar brezhoneg un arguzenn e-pad ur c'houlzad-kabaliñ evit kendrec'hiñ an dilennerien, evit sevel ur gartenn-bost, evit pinvidikaat ur mirdi met ul lodenn vras eus hor buhez pemdeziek.

Diwar-benn hor respontoù d'ar c'houlennaoueg ho peus kaset deomp : dre vras hon eus respontet ya d'ar goulennoù liammet ouzh kêr Douarnenez. Pa n'hon eus ket lakaet respont ebet ez eo peogwir e kav deomp eo diaes engouestlañ hep bezañ sur e c'hallfemp en ober. Da skouer evit krouidigezh ur greizenn-dudi, n'eus ket kalz e Breizh (hervezomp e Gwengamp hepken). Ret e vo da gentañ tout goulenn gant ar familhoù eus Douarnenez (hag ar c'humunioù tro-dro) ha goût pet a vefe dedennet ha pegement e vefe.

Diwar-benn ar gumuniez-h-kumunioù e kav deomp gwelloc'h chom fur ha chom hep respont peogwir ne ouzomp ket piv a vo ar muianiver ha petra a fell d'an dilennidi all war an dalc'h-mañ. Met dre ret e vo prechet eus se, mont a raimp e darempred gant an holl. Fellout a ra deomp lakaat e plas ur politikerezh yezh evit ar brezhoneg war skeul bro Douarnenez. D'an holl e Breizh eo ar brezhoneg, ret eo derc'hel ar binvidigezh-mañ ha talvoudekaat anezhi e kement live zo tout.

Bezit asur e kavoc'h ennomp tud gwirion ha gouiziek war dalc'hioù ar brezhoneg hag hor sevenadurioù ma 'z omp dilennet.

A wir galon,

Hugues Tupin,

E anv *Douarnenez, Douar keodedel*

## Questionnaire aux candidats — Élections municipales 2020

En em renkiñ a ra ar c'hinnigoù-mañ en-dro da bemp ahel, anezhe diazezoù ret ur gwir bolitikerezh yezh evit ar brezhoneg :

- ◆ **mont en-dro ar gumun** : ne c'hell ket bezañ eus ur gwir bolitikerezh yezh hep engouestloù fetis (da sk. ar garta « Ya d'ar brezhoneg »), nag anez lakaat en o flas ar c'hiriegezhioù hag an aozadurioù-kêr a ya gantañ,
- ◆ **ar c'helenn** : diskouezañ a ra ar c'helenn divyezhek, par pe dre soubidigezh, ur gwir nerzh soutenet gant ur goulenn bras a-berzh ar familhoù ; unan eus an oberourien pennañ an heni eo hiziv an deiz, asambles gant ar c'helenn d'an oa-dourien, evit treizhañ ar yezh,
- ◆ **ar c'hrouadurioù hag an troskol** : a-benn gwareziñ d'ar brezhoneg ar plas a zo dleet dezhañ er gevredigezh ne renk ket hennezh chom e diabarzh ar skol hepken ; ret eo kinnig ur choaj a oberiantizoù hag a zidu e brezhoneg par d'ar re e galleg,
- ◆ **ar c'henhentiñ hag ar panellerezh** : en tu all d'e gas a rummad da rummad eo ret d'ar brezhoneg bevañ er vuhez foran ha bezañ lakaet war wel er servijoù publik ivez, par d'ar galleg, ha kiriegezh an ensavadurioù-kêr eo kement-se,
- ◆ **ar glad sevenadurel dizanvezel** : anavezet ha gwarezet gant an UNESCO (Emglev 2003) hag UE emañ ar glad dizanvezel an eztaol war-eeun ha diazez eus dibarelezh sevenadur, yezh hag istor ur boblañs ; evel ar vevlieted e-keñver an endro emañ ar glad dizanvezel lod eus liested sevenadur Mab Den, ha dleet eo deomp e wareziñ hag e gas d'ar rummadoù all, peurgetket an anvioù-lec'h hag an holl zoareoù arz disheñvel.

### War live ar gumun

**Ma'z oc'h dilennet, hag eñv oc'h prest da engouestlañ evit ar poentoù-mañ e-pad ho respetad :**

- | Mont en-dro ar gumun   | Ya                                  | Nann                     |
|--|-------------------------------------|--------------------------|
| 1. Envel un den dave “yezh ha sevenadur Breizh” (eil-maer pe kuzulier dileuriet e karg eus ar politikerezh yezh).  | <input checked="" type="checkbox"/> | <input type="checkbox"/> |
| 2. Envel ur gwazour-kêr evel den dave evit lakaat ar politikerezh yezh da dalvezout, gant gwir barregezhioù-treuz.   | <input checked="" type="checkbox"/> | <input type="checkbox"/> |
| 3. Sevel ur bodad e-maes kêr e karg eus ar politikerezh yezh.  | <input checked="" type="checkbox"/> | <input type="checkbox"/> |
| 4. Sevel ur voujedenn-gêr evit ur gwir bolitikerezh yezh en erbed d'an divyezhegezh.   | <input checked="" type="checkbox"/> | <input type="checkbox"/> |
| 5. Karta “Ya d'ar brezhoneg” :   |                                     |                          |
| a. evit ar c'humunioù n'o deus sinet ar garta c'hoazh : he sinañ ha lakaat e pleustr an oberoù politikerezh yezh termenet gant OPAB evit tizhout live I ar garta ken ac'hann diwezh ar respetad a zeu. | <input type="checkbox"/>            | <input type="checkbox"/> |
| b. evit ar c'humunioù o deus sinet ar garta endeo : lakaat e pleustr an oberoù politikerezh yezh termenet gant OPAB evit tizhout al live a-us ken ac'hann da ziwezh ar respetad a zeu.                 | <input checked="" type="checkbox"/> | <input type="checkbox"/> |
| 6. Ober evit ma tesko brezhoneg ar wazourien-gêr ha ma raint gantañ.   | <input checked="" type="checkbox"/> | <input type="checkbox"/> |

## Questionnaire aux candidats — Élections municipales 2020

- |    | Kelenn   | Ya Nann  |
|----|--|--|
| 1. | Evit ar c'humunioù ma n'eus ket a ginnig kelenn divyezhek c'hoazh :  |  |
| a. | lakaat ur c'hinnig kelenn divyezhek e plas, par pe dre soubidigezh, e-pad ar respetad a zeu,   | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/>            |
| b. | <b>pe</b> reiñ an treuziad-skol d'ar skolidi o chom war ar gumun ha skoliataet en ur skol zivyezhek en ur gumun all.   | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/>            |
| 2. | Evit ar c'humunioù ma zo endeo ur c'hinnig kelenn divyezhek :  |  |
| a. | engouestlañ, ma n'eo ket bet graet a-raok, da ledanaat ar c'helenn divyezhek war an treugad skol en e bezh er gumun,   | <input checked="" type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| b. | souten da ziorren ar frammoù divyezhek e plas : skoazell arc'hant, lakaat savadurioù e-kerzh ar frammoù-mañ (reneveziñ tier kozh pe sevel tier nevez diouzh an ezhomm) pe kemer feurmioù an tier-skol e karg.  | <input checked="" type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| 3. | Souten da ziorren ar c'helenn brezhoneg d'an dud e-maes skol : kentelioù-noz, stummadurioù evit an dud deuet, stummadurioù-micher...   | <input checked="" type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| 4. | <u>Evit kumunioù Penn ar Bed hepken</u> : kenarc'hantaouiñ (gant kuzul departamant Penn ar Bed hag ar Rannvro) ar gwikefre da dañva d'ar brezhoneg savet gant ar c'huzul departamant hag an ensellerezh akademiezh, ha bountañ war skolioù kentañ derez ar gumun da ober gantañ. | <input checked="" type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |

- |    | Krouadurioù ha troskol  | Ya Nann  |
|----|---|--|
| 1. | Skoazell da arc'hantaouiñ ar c'hrouidigezh hag an diorren eus frammoù degemer divyezhek evit ar c'houadurioù ma n'eus anezhe war ar gumun.  | <input checked="" type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| 2. | Degas ur skoazell arc'hant d'ar frammoù degemer divyezhek evit ar c'houadurioù : mont en-dro, lakaat savadurioù e-kerzh ar frammoù-mañ (reneveziñ tier kozh pe sevel tier nevez diouzh an ezhomm) pe kemer feurmioù an tier e karg. | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/>            |
| 3. | Souten diorren an oberoù tañva hag astenn ar brezhonek evit ar c'houadurioù.  | <input checked="" type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| 4. | Skoazell arc'hantaouiñ ar c'hrouidigezh hag an diorren eus kreizennoù-didu e brezhoneg.   | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/>            |
| 5. | Souten diorren an oberiantizoù troskol e brezhoneg : sportoù, didu a bep seurt, sinema, teatr...  | <input checked="" type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |

- |    | Kehentiñ ha panellerezh  | Ya Nann  |
|----|--|--|
| 1. | Lakaat e plas (pe ledanaat e pep lec'h) ha eeunaat ar panellerezh divyezhek en un doare unvan ha par (hevelep lizherennoù hag hevelep ment evit an div yezh) war ar gumun en he fezh, peurgetket pa vez nevezaet panelloù kozh pe staliet panelloù nevez : plakennoù hent, panellerezh hent dindan ar gumun, panellerezh a-blaen (war an douar), savadurioù publik, skritellañ elektronek... | <input checked="" type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |

## Questionnaire aux candidats — Élections municipales 2020

2. Ledanaat an divyezhegezh par (hevelep lizherennoù hag hevelep ment evit an div yezh) e kehentiñ ar gumun : logo ha gêr-stur, embannadurioù-kêr, kannadig, lec'hienn internet, skritellañ foran, ficherezh darvoudoù ha gouelioù, levrigoù touristelezh...

### Glad sevenadurel dizanvezel

Ya Nann

1. Gwareziñ glad an anvioù-lec'h er gumun :
- a. o virout an anvioù-lec'h brezhoneg a zo anezhe (gant sikour an OPAB),
  - b. o krouiñ anvioù-lec'h nevez, anvioù-hent peurgetket, a ra gant an anvioù a zo dija hag a zo renablet er c'hadastroù kozh pe nevezoc'h (gant sikour an OPAB), pe pa n'eus ket anv kozh ebet, a ra diouzh istor ha sevenadur Breizh,
  - c. o skrivañ an anvioù-lec'h brezhoneg diouzh reolennoù an doare-skrivañ brezhonek a-vremañ.
2. Arc'hantaouiñ ar pleustroù-arz hag ar c'hrouiñ e brezhoneg.
3. Arc'hantaouiñ ar pleustroù-arz a denn eus sevenadur Breizh dre vras.

## Questionnaire aux candidats — Élections municipales 2020

### War al live etrekumunel

**Ha prest oc'h da ober evit kas ar brezhoneg a sevenadur Breizh war-raok en ensavadurioù etrekumunel oc'h engouestlañ evit souten ar poentoù-mañ :**

- |    | Ploitikerezh yezh  | Ya Nann   |
|----|--|---|
| 1. | Sevel ur voujedenn etrekumunel evit ur gwir bolitikerezh yezh en erbed d'an divyezhegezh.  | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| 2. | Sevel ur bodad etrekumunel e karg eus ar politikerezh yezh.  | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| 3. | Envel ur gwazour-kêr evel den dave evit lakaat ar politikerezh yezh da dalvezout, gant gwir barrezhioù-treuz.  | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| 4. | Karta "Ya d'ar brezhoneg":   |   |
|    | a. evit an etrekumuniezhioù n'o deus sinet ar garta c'hoazh : he sinañ ha lakaat e pleustr an oberoù politikerezh yezh termenet gant OPAB evit tizhout live I ar garta ken ac'hann diwezh ar respetad a zeu. | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
|    | b. evit an etrekumuniezhioù o deus sinet ar garta endeo : lakaat e pleustr an oberoù politikerezh yezh termenet gant OPAB evit tizhout al live a-us ken ac'hann da ziwezh ar respetad a zeu.                 | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| 5. | Ober evit ma tesko brezhoneg ar wazourien etrekumuniel ha ma raint gantañ  | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |

### Kelenn

- |    |   | Ya Nann   |
|----|---|---|
| 1. | Ledanaat ar c'helenn divyezhek war an treugad skol a-bezh en etrekumuniezh.   | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| 2. | souten da ziorren ar frammoù divyezhek e plas : skoazell arc'hant, lakaat savadurioù e-kerzh ar frammoù-mañ (reneveziñ tier kozh pe sevel tier nevez diouzh an ezhomm) pe kemer feurmioù an tier-skol e karg. | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| 3. | Souten da ziorren ar c'helenn brezhoneg d'an dud e-maes skol : kentelioù-noz, stummadurioù evit an dud deuet, stummadurioù-micher...  | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |

### Krouadurioù ha troskol

- |    |   | Ya Nann   |
|----|---|---|
| 1. | Skoazell da arc'hantaouiñ ar c'hrouidigezh hag an diorren eus frammoù degemer divyezhek evit ar c'houadurioù ma n'eus anezhe en etrekumuniezh.  | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| 2. | Degas ur skoazell arc'hant d'ar frammoù degemer divyezhek evit ar c'houadurioù : mont en-dro, lakaat savadurioù e-kerzh ar frammoù-mañ (reneveziñ tier kozh pe sevel tier nevez diouzh an ezhomm) pe kemer feurmioù an tier e karg. | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| 3. | Souten diorren an oberoù tañva hag astenn ar brezhonek evit ar c'houadurioù.  | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |
| 4. | Souten diorren an oberiantizoù troskol e brezhoneg : sportoù, didu a bep seurt, sinema, teatr...  | <input type="checkbox"/> <input type="checkbox"/> |

## Questionnaire aux candidats — Élections municipales 2020

### Kehentiñ ha panellerezh

Ya Nann

1. Lakaat e plas (pe ledanaat e pep lec'h) ha eeunaat ar panellerezh divyezhek en un doare unvan ha par (hevelep lizherennoù hag hevelep ment evit an div yezh) war an etrekumuniezh en e bezh, peurgetket pa vez nevezaet pannelloù kozh pe staliet pannelloù nevez : plakennoù hent, panellerezh hent dindan ar gumun, panellerezh a-blaen (war an douar), savadurioù publik, skritellañ elektronek...

2. Ledanaat an divyezhegezh par (hevelep lizherennoù hag hevelep ment evit an div yezh) e kehentiñ an etrekumuniezh : logo ha gêr-stur, embannadurioù-kêr, kannadig, lec'hienn internet, skritellañ foran, ficherezh darvoudoù ha gouelioù, levrigoù touristelezh...

